



LOU ARNIG

Niv. 17



Ar c'hokodiled



An aotrou Barbellig



Amazonia

Ar c'hokodiled

D'an deiz a hiziv e vezont kavet e Su Amerika, Kreistez Amerika, Afrika hag Australia.

Stlejviled gwad yen a zo anezho, neuze e plij dezho ar pastellioù-bro tomm el lec'h ma c'hellont tommheoliañ war ribl ar stêrioù.

Difiñv kaer, sioul, en em daolont a-dizh en dour.

Pa'z int yaouank e tebront amprevaned, blodeged pe raned, preizhourien eus ar c'hentañ int pa'z int bras avat.

Hag i war evezh war c'horre an dour e tagont ar re a zeu d'ar stêr da evañ : labous, zebr pe kement loen difur all.

Diwall d'e javed ! An dud zoken zo preizhoù d'ar c'hrokoldiled brasañ.

Bravat dent !



Chaseour

Da 20 km/h e red en dour. Implijout a ra e zaoulagad hag e fri a zeu e-maez an dour tra ma van soubet e gorf. Kizidik eo e zivskouarn ivez...



A bep seurt ment

Meur a spesad krokodiled zo. Er memes spesad eo an aligator hag ar gavial.

Betek 2 vetr hirder e c'hall krokodiled korr Afrika bezañ tra ma c'hall lod krokodiled aberioù Azia muzuliañ 7 metr evit un donenn bouez.

Kig krokodil

Chaseet e vez ar c'hokodiled evit o c'hroc'hen hag evit o c'hig ivez. Diwallet ar c'hokodil sañset, e fin ar bloavezhioù 70 e veze lazhet daou vilion anezho c'hoazh pep bloaz. Hiziv ez eo div wech nebeutoc'h. Perak avat, abalamour ma'z int diwallet pe dre ma'z int nebeutoc'h ?

Testennoù ha luc'hskeudennoù gant Fred Lavail.

Dozviñ a ra ar c'hokodiled. Toullet e vez un neizh gant ar parezed a zovz etre 20 ha 80 vi. E-pad 80 e tifennont o neizh, hep debriñ netra. Pa vez ganet ar re vihan e vezont kemeret ha treuzdouget gant o mamm en he geol.

